

**Ar mab libertin.**

Tad eternel Roue a c'hloar  
Krouer an en ag an Douar,

Dirazoc'h humblamant prosternet  
Deuan da c'houlen eur reket.

Deus a eun den iaouank dibordet  
A gant Doue aba(n)donet.

Doue ne abandon den e bet  
Na vez da genta abandonet  
Dar vissou kruel deus ar bed  
Evel men devoa raportet.  
Deus eun den iaouank dizoboïsans  
Pinvidik bras a den vaillant  
Instruet mad e voa ive  
Gant he dud a gare Doue.

Pam devoa triwarc'h vloaz oajet  
ti he dad en devoa kuitet  
kasset gantan nombr a zanvez  
Evid kundui e wal vuhez.

He dad prestik a zo dessedet  
Ma ze deud an den possedet  
Dober de vam rei dezan danvez  
E denvoa evid souten he vuhez.

— Allons mam kris a man divad  
Mam dinatur a mam ingrat. —

— Allons mam(1) <sup>kris</sup> ~~fat~~ diremet  
Arc'hant a rankan da gaouet

A roi-t-hu dime promptamant  
Pe me o lac'ho en eur prezant.

Dar gouin e voa chujet dar merc'het  
D'an danzou a dal lioudouet.

Ma retournas (d)e zebochou  
Evid peurfripa e vadou.

Ar merc'het fall, e kamaradezet (2)  
En deveus en ezan kalonet

D'ober de vam rei dezan danvez  
en devoa vid souten he buhez.

— Allons man kris a diremet  
Arc'hant a rankan da kaouet

A roït-tu dime promptamant  
Pe me o lazo en eur prezant.

— Penos mab fal a diremet  
Va oll arc'hant did e moa roëd

Roet e moa dide tra da dad  
En arc'hant sec'h ag e dillat.

Ar mam baour a komans da grial,  
Ar maleürus a sko raktal,

Da roas d'he mam seiz tol gontel  
a laza e vam an den kruel.

Pa voa e vond gant an ent bras  
Eur *grucifig* gaër e rankontras

e lec'h goulen gant Doue pardon  
E c'hentren an Diaoul en he galon.

Abourdi a eure ar groas  
Tri kol (3) gontel dizi a roas.

A ken ma skoas ar pevare  
E zorn zo staget oc'h e goste.

E zorn doc'h e c'hostez a zo staget  
Hag e zistaga ne halle ket.

Kement a me krie neuze  
He deuas tud deus ar c'hontre

Da gaout kroas ar mission  
Da c'houd petra voa o rezon.

Ar berson a deuas ive  
Gant he brossession neuze

Evid e distaga doc'h ar groas  
Goulen pardon dezan a groas (4)

Hag evel ma voa distaget  
D'oc'h ar groas dorn an den miliget.  
An douar dindan e dreit zo digoret  
En puns an ivern e zeo kouet.  
Didostait aman dud libertin  
A klevit (5) breman pe seurt fin  
E erru gant an oll grimou  
Kometet eneb on autrou.

Mar domp ni bed var ar bed man  
Ken debordet evel eman  
Da veza offanset Doue  
Greomp breman pinijen neve.

Anna Briant, greg Prigent, e chom er Rest  
en Taole. 24 juin 1851.

(1) L'm final (de mam) est écrit sur un -b-.

(2) le -k- de kamaradezet écrit en surcharge sur : c'h.

(3) Ms : kol ; lire : dol. (4) Ms : agroas ; lire : areas.

(5) Le -v- (de klévit) écrit en surcharge sur un -f-.